

CHANSON NEVEZ

29
*GOMPOSET gant un Den yaouanc eus a bares
Briez, voar sujet e Vestres pehini e c'har gant
un amitie barfet. Voar un ton nevez.*

CHilaouet ur chanson, So nevez compost,
Pehini a so savet, E mil eis cant naontec,
Savet gant un den yaouanc, Er blaes-mà presant,
En deus laquet e speret, Da re garout e c'hoant.

Nac ebars e Briez, Er blaves-màn presant,
On dra melconius, Etre daou zen yaouanc,
Pere dre amitie, O devoe desirer
An eil d'eguilane, Vejen bed dou briet.

Evel d'or bar avel, Heruas promptamant,
Bars er proposiou caër, Voa bed dent chenchamant,
A nep a songe deon, E voa sur ha fidel,
A so bed trahisset, Ya, n'en deus quet pel.

Tud ar plac-màn a so, Eus a dud a locanc,
Graç deo da brosperi, Ebars er Brovidanc;
Ma vuelfein heb-dale, An daou briet fidel,
Ebars en o jardin, Fleurioù caer o sevel.

Memeus choaset ur vestres, A so d'am faltasi,
Pehini dre e guenet, A so deut d'am c'halmi,
Ganti ma an alviou, Eus a zor va c'halon,
Pehini or groa contant, On daou e pep feçon,
E bleo so allouret, Melen e zint friget,
E anal adorap, Evel pa ve musquet,
E daouarn so melet, Gant ar glas hag ar guen,
E bisaich in graet, Evel d'or berlesen.

E musellou so douç, Douç, douç evel ar mel pur,
E anal adorap, Evel d'ar sur natur,
E daou lagat a vrill, Evel diou stereden,
E gousouc a so caer, Evel d'or barlesen.
E mouez so ravissant, E speret angelic,

A laça rivierou, Da zansal manific,
An oll dour a saillo, Ar pesquet a lamo,
Hac ar vartolodet, En o lest a zanso.

Ma mestres a so caer, Evel d'ar bleon spern guen,
E diou chot a so ru, Evel da ziou rosen,
E ehyenou so caër, Quer bras ez eint pinter,
Dridal ra va c'halon, Na demeus o guelet.

Dridal ra va c'halon, Na demeus e guelet,
Mar fel doc'h gout pion eo, Tinic e zei hanvet,
Balamour ma credon, On gant Done inspiret,
Nac evit e c'haret, Gant amitie barset.

Memeus caret va mestres, Hac e c'haro bepret,
A me e c'hurunse, Ma ve din permetet,
A me e c'hurunse, Ma ve din permetet,
Quer caer vel e c'havan, Vel d'an eol biniguet.

E mam so quer charmant, Nac ebars er bed-màn,
Hi a garon certen, Vel va mam va hunan,
Balamour ma e hi, E deus laquet er bed,
Ur plac'hic yaouanc flam, Pini garon parset.

Delic a so quer coant, Vel d'ar ros er bed-màn,
Hounes a dra certen, A blich d'an dud yaouanc,
Balamour de furnes, Hac e santimant vad,
N'en deus den er bares, Vel dei quen agreahl.

O c'hoar demed a so, Ur vroec fur a prudent,
O breur a so ives, Uu den yaouanc vaillant,
A tout o oll gueren, So tut a lignez vad,
Deud ol do imita, Gant o exemplou mad.

Doue neus croet ar gue, Nac ebars ar bed-me,
Hac a ve fleurissant, Pa ve deut ar mis-me,
Calon an dud yaouanc, So ives memes tra,
Pa ve deut ar mis me, A ve carguet a joa.

Pa m'en em c'ham a goste, O sonjal bras ar bed,
Me glev ur voesic cler, A double va speret,
Ma teuis da songal, Pe clevis o cana,
Voa un eotic, pe or voenus, Pe ma mestres Tina.

Arsata va mestres, Avanç a rem en oad,
Bud a so on amser, Evit ober pep-tra;

Mar be-contant Doue, Ni allo assambles ;
 Caer o devezo an dud, O trouc presegueres.

Goal Doue or c'hunduo, Lec'h mo e volontez,
 Caer o deveso an dud, O trouc préseguerez,
 Domach ar rel a reont, Hin na vueleont tam,
 O trouc predi bemdeis, D'oc'h eme a d'oc'h eont.

Ganti ma an alfe, Eus a zor va c'halon,
 Hi e deus hi digor, D'ar verc'hès hon itron,
 Hi e deus hi digord, D'ar verc'hes hon itron,
 Evit antren enni, En e fossession.

Mari ha sant Joseph, Voent o daou assambles,
 On devoue amitie, An eil evit egiles,
 An dra se a so caus, Meus laquet em speret,
 Da gaont ur plac'hic, Martese n'am c'ha quet

Quemen-ma e c'haran, Ne oufe den laret,
 Me garfe e dougen, E tonez an elet,
 A neuse pa vem ed, Ebars er barados,
 An dud malicius, N'antrefin quet er gos.

Ma vezimp unisset, Dre ar c'hraq a Zoue,
 Ne g fomp quet an amser, Hiroc'h evit eun de,
 Quen a vo deut an heur, Da vont eus ar bed-màn,
 Pa zeuint da vernel, Mont a gare gantàñ

Me bresantfe dei ur boquet, Ma ve permetet din,
 Pehini e ma c'halon, Ne gar den nemeti;
 Mæs ma na bermet quet, Nac o queren ganoc'h,
 Adieu, er barados, Quenavo a laran d'oc'h.

An teot malicius, So caus a gals a gol,
 Quement a so ane, Ma reont dronc ar bed-oll,
 Ma alsen commandi, Ebars ar joaüstet,
 Gant ho amission, Ne alfe den monnet.

Mes gouzout eo a raon, An amission so bras,
 Henes so ur pec'het, Ha ne quitaît quet c'hoas,
 E touez ar gueren, Memens ar re doste,
 A ve an amission, A vechou ar goasse.

Ar son me zo savet, Certen bag a zo guir,
 Zo savet d'on den yaouanc, Nal quet caote zezir,
 Abalamour d'an dud, Gant o amission,

So o zampech aneon, Nac ebars er c'hanton.

Martrese lod a c'hoarso, Voar sujet ar son me;
 C'hoarsin ar pez a garfin, Na rin quet a boan dime,
 Lod a ve o c'hoarsin, Na voar o soutoni,
 A pedal oc'h ober goab, A nezo e mon in.

Ma clefe ar roue, Quelou eus ar plac'h-me,
 A zeufe da Vriec. Ganton ur messager,
 Da brononc ar c'helou, Enep ar plac'h yaouanc,
 Evit ma tisabuso, Quemen en deus dei c'hoant.

Adieu melesour caer, Adieu tremen amser,
 Mont a ran da Vuengant, En un desert a ger,
 Ma ma losq d'ar goal deot, Vern quet piou a zisput,
 Ma c'halonic a rano, Ar goal deot ra vo mud.

Mar fel doc'h gout a clevet, Gant piou er son-me gret,
 Gant ur paysant yaouanc, Eus a barres Briec,
 Gant ur paysant yaonanc, Eus a draon ar bares,
 Henes en deus isavet, Goude goan un nosves.

Mes mar eus unan benac, Bars er gompagnunes,
 Hac en defe desir, Da c'out piou eo henes,
 Eo ur paysant yaouanc, Eus a dreo ar gresquer,
 Mar fel doc'h gout piou eo, C'hui c'halvo an eo Per.

Arsa compagnunes, Excus a c'houennaon,
 Me so un den yaouane, Nem deus quet a speret,
 Difaiet ac'hanon, Elec'h ma zon faiet.

Clevet a ret breman, Cetu e mei er fin,
 C'hui a lesy anei, Ma ne ouzoc'h quet quin,
 A nep a gavo deon, Nem de quet dereat,
 A gomposo un all, Hac a vo agreapl.



CHANSON NEVEZ

Go MPOSET voar sujet un dud yaouanc, pere o dese ur garante barfet hac ar goal deotou miliguet pere a false de e ven separer.

NA didostet cos a yaouanc, Me o supli ac o pad,
Da chilaou cana ur chanson, Nevez savet nevez
composé, Hac a so savet var ar sujet daou zen yaouanc,
Hac o devoue desirer, Evigen o daou demeet, Bars
er blaves mil eis cant trivuec, Pehini a so passeet.

Ar goas yaouanc a lavares, Un deis a voa, da vam
e vestres, O merc'h ha me on devoue desirer, Da ober
ur briadelez, Ni on devoue, on daou desirer, E vigen
on daou demeet, Bars er bloas 1818, Pehini so passeet.

Ar vreg-màn dezàn a respondas: Ne mai quet en imour
choas, Mes pa feller couet digarez, A ve clasquet trou-
you bras, A pedal an daou zen yaouanc, A voa quer
contant o daou, Mes ar goal deotou miliguet, So
deut da soueltri an traou.

Ar femelen a respondas, Gant ur guir intantion,
Den yaouanc memeus caret, Demeus a greis va c'halon,
Den yaouanc memeus o caret, Gant ur guir fidelite,
Gant an amser ni a zemezo, Na ma chomom e bue.

Ar femelen-màn so ur plac'h, Pehini a so caret, Un
nombr bras a potret yaouanc, En deus-hi bet goulennet,
Un nombr brassa potret yaouanc, En deus-hi bet goulennet,
Choasete deus ur mignon yaouanc evite c'henta fried.

Teotou fal a so dre ar c'harter, Hac o deus bet aliet,
Queren ar plac'h yaouanc-màn, da bresanti o requet,
Presantet o deus liseriou, Chomet in er parlament, Ne-
met enne a ven aretet, Dimi a raï an dud yaouanc.

Goassoc'h eo an amitie bremàn , An anter vit ne voa quen , Dimisi a rai an dud yaouanc , Met conge ar vam na fot quen , A rac-se ta teot ar vosen , Leset o teot no qui-nou , Car c'hui so o hober domach , Elec'h ma helet er vro,

Me ho suppli tadou ha mamou , Pere a vag bugale , Pa iafint da choas o faltasi , Na ampechit quet an è , Po zeuyo en o faltasi , Monit da choas o mestreset , Roit dezo o penediction , A Doue ra vo meulet.

Ar son-me a so compost , N'en de quet evit unan , A neb a glevo e c'hana , Martese no nec'hamant , Pa zeuyo eno faltasi , Na mont da choas o c'hoant , Roit dezo o penediction , A Doue ra vo contant.

Ya , a gant a ma velfet , E tiguefin deread , Na zeut jamæs da revusi , Ur fortun o agreap , Car gou-dese-ta martrese , C'hui a alfe regretat , Mes pa ga-vant an en an tu , Eo a ve deon profita.

Me o supli goaset yaouanc , Nint pere a ret ar bed , Na laqueomp quet or sperejou , D'ar re garout ar meriet , Ispicial a re na ne quet on intantion , Da souten deo o e-nor , car pa yafomp d'ar barados , nin a chomo toul a nor.

Mar e fel da gout a clevet , Piou en deus savet ar son , Ez eo un den yaouanc sansouci , A so e chom er canton , Ez eo un den yaouanc sansouci , A so e chom er harter , Henes en deus-hi compost , Un nosves pa voa er guer.

Mar e fel d'oc'h goud e hano , hac ives e signori , Mes an dut a so er vro-màn , ne ouzont met caquen , A rac-se-ta caqueterien , Gret goap ar pez a alfet , An nep en deus giêt ar son-màn , Na lar guer deus a den e bet

Mes quemense etouetan , o aleis o vurmuri , Abala-mour d'ar chanson-màn , Ar vuyrione so enni , Ne quet me eo a so cos , Na marc eus goaldeotou , Ma carsen non pas laret drouc , ne dese quet reprochou .

CHANSON

*E t r e daou zen ac o dese an amitie barfet an eil
evit eguile, a po dese ar maleur da veza dispara-
tiet e ven chagrinet bras.*

Quemen tra so er bed , Tout a zeziront doc'h ,
Ya , ma ven demeet , ac ed da chom gueneoc'h . Tut
cos a tut yaouanc , Deut da chilaou va c'лемou ,
Roїt din mar c'heus voyen , Remed eus va zourmanchou ,
Allas difficil eo soulagi o clenvet , Eus on tourmant
quer cri , N'en deus quet a remed.

Me maleürussa den , So bed biscoas er bed-màn ,
Hirio e mon joaüs , Hac er choas e vin e poan ,
Me yal da di dadi , Mesq an den charitabl , Evit
ma c'honsoli , Em etat deplorabl.

Evel ur rossignol , Ha dious nos ha dions mintin ,
Evel d'an drujunel , Queit ha ma pad e anel , Me
na songe quet din , E teuse ar maro , Da lemel
diganin , Hini garen moyo.

Quitet emeus ma far , Quitet emeus ma fianç ,
Quitet eo va mignon , Quitet eo va esperanç , Nam
beus mui a souten , Adieu d'am plijadur , Cetu int
colet tout , En ur ober un eur.

M'em beus ur feunteunic , Bars e cornic ma jardin ,
E ven cavet enni , Ha dious nos ha dious mintin ,
En parti va hunan , E mez a vesq gant dud ,
D'ober va demeuranç , E mesq gant loenet mud.

An douster eus an dour , O redec dre ar goueyou ,
Heurtet ha diheurtet , Dre doues ar veignigou , A
zeu da zigac song din , A zouster va mignon , Bep
heur ha bep moment , Da biqua va c'halon.

Chaden an amitie , Chadennic a garante , Red e vez coer pe blom , Queit a ma monto huse , Au ouarn hac an dir , A us gant an amsez , Ur garante barfet , jamaes ancounac'het.

Evel d'an tolennou , Ar potret eus ar beyou , Ar froesigou brein coet , Dindan ar gueigou , A represant e c'horf , En douar anterret , Hec e es-quernigou , Crignet gant ar privet.

Desir meus ur vech c'hoas , Ya evit e guelet , Sempli ra va c'halon , Na bep heur na bep moment , Red eo gortos an eur , Ma blijo gant Done , O lacat assambles , Hed on eternite ! ...

FIN.